

A-RAOK

ANDRO

A-raok

A-raok Plantec

A-raok an dañs

A-raok ar sonerezh

'Maon o vont da ganañ

Ur ganaouenn nevez

'Maon 'paouez ijinañ

Diwar-benn ar vuhez

N'eus netra pouezhusoc'h

'Vit kaout ur vuhez vrav

Ar pezh a gontan deoc'h

A zo gwir n'eo ket gaou

Kroget ma buhez

Kan, Koll, Kri, Kraz

Morse 'm ije kredet

Kan, Koll, Kri, Kraz

Ar pezh 'zo c'hoarvezet

Kan, Koll, Kri, Kraz

Ganin un devezh

Kan, Koll, Kri, Kraz

A-raok

Pa vez yen pa vez tomm

Pa vez glav pa vez erc'h

Hep disoñjal ar from

Eo dav bezañ dinec'h

Forzh peseurt nec'hamant

Zo moaien da renkañ

N'eus ken bezañ kontant

Ha laouen da vevañ

Laouen da vevañ...

'Vit ober c'hoariva

'Vit ober sonerezh

Ar pezh 'zo pouezusañ

Eo karout ar vuhez

A-raok

A-raok an dud

A-raok ar bed

A-raok an Douar

A-raok Plantec

A-raok

RUST HA KALET

TON SIMPL GAVOTENN

Tud yaouank a Vreizh Izel, didostait da glevet
Un istor eus ma daeloù ha ma foanioù kalet

Me 'zo ur c'hloareg yaouank, eus eskobti Kemper
A oa kaset d'ar studi da skolaj Landreger

Planedenn rust ha kalet

War vord ar mor 'oan ganet e bro Sant Wenole
Ha netra nemet glac'har n'am eus bet em buhez

Glac'har a gwir garantez, setu ma flanedenn
Planedenn rust ha kalet da heuliañ penn-da-benn

Planedenn rust ha kalet
... Rust ha kalet

'Tont da lâret din « ma mab, ped gwerc'hez Rumengol » ...

*L'histoire d'un jeune clerc qui n'a eu que des malheurs dans sa vie.
Le jour de son entrée au séminaire pour devenir curé, il rencontre la femme de sa vie...*

Mintin

Tamm-kreiz

Disul vintin pa saven
Paket gant un drouk penn

*Biken n'ez in da soniñ
D'ur fest-noz e Pondi
Biken n'ez in da ganañ
D'ur gouel e Landeda*

Disul vintin pa saven
Kresk ar blev 'barzh ma fenn

*Biken n'ez in da zañsal
D'ur fest-noz e Lokoal
Biken n'ez in da ganañ
D'ur gouel e Landeda*

Pa saven eus ma gwele
Ne oan ket vit bale

Setu buhez ar soner
Noz ha deiz o riboulat
Ha bremañ ne chom din 'met evañ

Un dimanche matin, après une nuit de fête...

DISTREIÑ

TON DOUBL GAVOTENN

Nozvezh kentañ ma eured, me 'm oa komandamant
Da vont da servij ar Roue, ret 'oa bezañ kontant

Dont da servij ar Roue, 'vit souten an armoù
Ha ma dousig Frañseza chom er ger 'ra 'met gouelañ

Tavit tavit Frañseza, tavit na ouelit ken
Kar a-benn un daou pe dri bloaz, me 'teuy c'hoazh d'ho kwelet

Digant ar vatezh vihan da gentañ 'n eus goulennet
Bonjour deoc'h matezh vihan, na c'hwi ma lojefe ?

Hemañ a oa ur paotr fin a ouie mat an doare
Az eas da gaout an dantin gozh e-barzh ar gambr a-gostez

O pas sur 'ta emezi, amañ na vec'h ket lojet
Tud an eured 'zo ouzh taol ha gante on okupet

Hemañ c'hoûlas ar c'hartoù, pe an dominoioù
Petramant ar wreg eured da parlantiñ gantañ

O c'hwi ya sur emezi, biskoazh 'm eus refuzet
Parlantiñ gant un den feson, m'emañ din permetet

*La première nuit de son mariage, un jeune homme est appelé au front.
Cinq ou six ans passent et il revient la soir de la noce de sa bien-aimée qui se remarie...*

N'EO KET STRIK

Sot eo un den yaouank a lak n'e fantazi
Kariñ ur plac'h yaouank hep bout sur anezhi

*Reiñ, reiñ,
Roet em eus ma c'halon d'an hini ma c'har ket
Treiñ, treiñ,
Troet eo dezhi ma fenn ha troet dezhi ma spered*

Betek an deiz 'oan disodet
'N iliz Kalan 'vit an Drinded

Me 'm oa n'em roet ker ha kalon ha spered
O soñjal kement all gant 'n hini 'm oa choazet

Reiñ, reiñ

...

Betek an deiz 'oan disodet
'N iliz Kalan 'vit an Drinded
Oac'h 'vont d'ar gêr kazalet
Gant un den n'anvezan ket

An hent d'ar gêr ivez me am eus kemeret
Da begoulz 'voen erru biken n'am eus gouiet

SKLAER

TON SIMPL FISEL

An daou gamarad fidel a lâre 'n eil d'egile
Deomp d'ar red 'ta kamarad, deomp hon daou da vale

Deomp d'ar red 'ta kamarad, deomp hon daou da vale
Deomp da welet ma mestrez, hag ho hini ivez

*Mont a raemp en ur ganañ
Betek penn al leurgêr
An amzer a oa ken brav hag al loar a oa sklaer*

Ni a oa daou zen yaouank karget 'walc'h a spered
'N ur antreal 'barzh an ti, bonsoar a meump lâret

'N ur antreal 'barzh an ti, bonsoar a meump lâret
Hag an dud 'barzh an ti-mañ, toud emaint ho yec'hed

Deux amis s'en vont marcher dans la nuit, pour aller voir leur bien-aimée...

KOLL

BAL FISEL

Deomp da vale, kamarad
Deomp d'ar red
Deomp da vale, 'p oa lâret din
Ha deomp da wel 'nezhi
Rak ni meump traoù da lâr, te welo
Met n'eo ket chom da dortal

Koll, koll

Selaouet 'm eus, sentet 'm eus, hag heuliet 'm eus
En hent 'oamp bet hon daou, da wel 'nezhi ha da lâr traoù
Me 'm oa kemeret ma amzer
Rak oa ket mal warnon
A-benn ar fin, ur wech erru enno
E oa re ziwezhat

Ur wech erru dirazi
'Oan ket kab da lâr netra ken
Kaer 'm oa komz, kaer 'm oa huchal ha kaer 'm oa fiñval
Ne teue son 'maez ebet eus ma beg
A-benn ar fin
En ur soñjal
'M eus komprenet 'm oa gortozet re
Hag e oa re ziwezhat

Quand il s'agit d'amour, on ne devrait jamais attendre pour dire les choses...

KEJET

TON DOUBL FISEL

Kejet, kejet, didostait da glevet

Tud yaouank a Vreizh Izel, didostait da glevet
Na c'hwi ivez paotred yaouank ha c'hwi ivez ar merc'hed

Da selaou kaniñ ur son, kompozet ar bloaz-mañ
A zo graet eus daou zen yaouank evit 'n em zivertisañ

Kejet, kejet, o deus bet etreze
A oa da bardon ar Releg, en eskobti Kerne

Kejet, kejet, an daou bichon yaouank
Hag eno 'n eus 'n em saludet gant div galon gontant

Ar plac'h a jointas he daou zorn o sellet 'trezek an nec'h
Da vetek amañ, ma Doue, me 'me eus bevet dinec'h

Da vetek amañ, ma Doue, dinec'h me 'm eus bevet
Ha me n'on ket evit teurel kont dimeus ar pezh a lârit

Kejet, kejet, Rouanez a Gemper
Biskoazh plac'hig nemedout 'n eus charmet ma spered

Kejet, kejet
Ha war sujed an dimeziñ me a barlanto ivez

Kejet, kejet, ne rafe nec'h deoc'h
Gant ar c'homzoù favorabl am eus me lâret deoc'h ?

Kejet, kejet, da zimeziñ ar bloaz-mañ
Lakit din-me un termen, me 'c'hortozo 'nezhañ

*La rencontre de deux jeunes tourtereaux.
Si elle préfère attendre pour le mariage, il attendra le temps qu'il faudra...*

EN EGOR

Eus an egor
'Vez gwelet traoù
Leun a enor
An Douar 'zo brav

Met pa seller
Un tamm tostoc'h
N'eo ket ken kaer
N'eus ket da gaout lorc'h

Ar brezelioù
Ar saotradur
N'int ket profoù
'Vit an natur

Planedenn c'hlas
Planedenn c'hlan
Deuet da vezañ kraz
Dre gwall an tan

Bezañs an dud
War an Douar
N'eus ket ar brud
'Vefe dispar

Ha koulskoude
Den na soñj dezhañ
Ne 'vefe dre
E faot dezhañ

KROG

HEULIAD PLINN

Ur plac'h yaouank diwar ar maez
'Oa aet d'ar vilin un nozvezh

Tal ar vilin p'oa erruet
Ar miliner a oa kousket

Dihun, dihun 'ta miliner
Mal din ma sac'had dont d'ar gêr

Petra 'zo ganeoc'h 'n ho sac'had
Dre ma teuit ken diwezhat

Kerc'h ha segal ha gwinizh du
M'emañ ho milin war he zu

Ha dre ma kouezhe ar bleud b'ar gern
Ar miliner a groge ferm

Pe war he zu pe n'emañ ket
Ho sac'had c'hwi a vo malet

*Un jeune fille s'en allait un soir au moulin.
Au fur et à mesure que le grain devient farine, le meunier se rapproche de la fille...*

DA LEC'H ALL

KELC'H SIRKASIAN

E-kreiz an noz
Ur barrad avel
An nor o strakal
Hag un den

En deñvalijenn
Ur vantell gantañ
Un den kalet
E spered

...
kalet

Deus ganin-m
Na pezh ket aon
Heuilh ac'hanon

Lâret 'n eus din
Mouezh kalet ar mein
Deus 'ta ganin
Ha treiñ kein

Heuilhet 'm eus 'nezhañ
Klasket 'm eus nezhañ
Met 'm eus ket kavet
E spered

...
kalet

Dans la nuit noire, un coup de vent, la porte s'ouvre sur un homme qui cache son esprit...